

## ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

63

**NOËL PASTORAL** <sup>(69)</sup>

Pastoret deut redet timat,  
 Deut da velet Jesus ho Tat,  
 So ganet henvoaz gant Mari,  
 E Bethlelem Quer da Zavi :  
 Pastoret deut redet timat,  
 Deut da velet Jesus ho Tat.

Pastoret deut, na c'hortoit mui,  
 Leset ho tenvet da beuri,  
 E Bethlelem Quer da Zavi,  
 Er c'hassteen ur marchaussi  
 Pastoret deut redet timat,  
 Da visita Jesus ho Tat.

Voar ur vriat foën é guasset  
 Roue an Dut hac an Ælet,  
 E creis etre daou aneval,  
 En ur plaçic du ha tenval :  
 Pastoret deut redet timat  
 Da adori Jesus hon Tat.

E quichenic é Vam Vari,  
 En er c'hasset leun à anui,  
 Hep tan, hep lian, hep meser,  
 Leun ha baourentez ha miser :  
 Pastoret deut redet timat  
 Da soulagi Jesus ho Tat.

<sup>(69)</sup> Extrait du P. Maunoir, *An hent da vont d'ar Barados*. Ce Noël figure parmi les *Canticou gret gant re all* et peut être du P. Martin.

## GUINNANÉE

Mari é vam er briata,  
 Er c'har er boüich gant cals à-joa,  
 He C'halon a so ravisset,  
 O velet nep en deus-y croüet :  
 Pastoret deut yvé timat,  
 Da vriata Jesus ho Tat.

Guelet pegument en ho car,  
 Evidoc'h eo deut voar an doüar,  
 Commanç à ra deja goëla,  
 Da commanç hon encou prena :  
 Pastoret deut redet timat,  
 Da goëla gant Jesus ho Tat.

An Æles gant ho c'hanticou,  
 So disquennet eus an êvou,  
 Da ober d'an aër resoni,  
 Dre ar c'han eus ho meuleudi :  
 Pastoret deut yvé timat,  
 Da cana Meuleudi d'ho Tat.

Ur stereden scler ha brillant  
 A so savet en Oriant,  
 Voar e lerc'h e teu tri Roué,  
 Da digaç presantou gante :  
 Pastoret digaçet timat,  
 Yve pep a present d'ho Tat.

Herodes an Tyran cruel  
 O clasq é laquat da vervel,  
 A ya da zigaç soudardet  
 Da laza an Inocantet :  
 Pastoret deut redet timat  
 Deut da difen Jesus ho Tat.

## ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

65

Christenien ha Christeneset,  
 Assambles gant ar Pastoret,  
 Deut oll gant guir devotion  
 A speret hac affection :  
 Querzomp, redomp, hastomp timat  
 Da visita Jesus hon Tat.

E ziou chot caër ha biniguet  
 A so gant an daërou gloëbet,  
 D'hon tenna à daounation,  
 Ha da commanç pea hon rançon :  
 Christenien quemescamp timat  
 Hon daërou gant daërou hon Tat.

Commanç à ra deja douguen  
 Ar Groas evit ar pec'herien,  
 Souffri à ra cals à boaniou,  
 Da effaci hor pec'hejou :  
 Christenien commancomp timat  
 Da zouguen ar Groas gant hon Tat.

Deja é offr a vir galon,  
 Gant ar guir resignation,  
 E corfic tener d'ar maro,  
 Da ober hon Eneou, salo :  
 En em offromp yve timat  
 Da vervel gant Jesus hon Tat.

En, ha douar, dour, ha mor glas,  
 Oll tut ar bet bihan ha bras,  
 Oll Ælet, oll anevalet,  
 Quement so gant Doué croüet :  
 Querzomp, redomp, hastomp timat  
 Da renta hon Homag d'hon Tat.